

KENTSKRID

Teir lodenn a ya d' ober LAVAR 13 : notennoù savet etre Mae 1999 ha Gwengolo 2000, Gerva Prederouriezh LAVAR 11, Menegvaoù LAVAR 13.

NOTENNOU LABOUR

Un darn vat eus notennoù al levrenn-mañ (ur palevarzh eus an titloù, un drederenn eus ar pajennoù) zo gouestlet da lavar an arvestoù. Disoc'h a reont eus labour ar bodad a brientas *Geriadur ar Mediaoù*¹. Gant ar fiñveier e pledont dreist-holl, evel ar *Geriadur* e unan — evel al levrenn gentañ anezhañ kentoc'h, rak levrennoù all a zeuy d' he c'hlokaat war ar c'hoariva, ar pellwel, ar radio, ar wask... pa vo bet amparet ar bodadoù labour rekis.

En eil renk ent kementadel (war ur bempedenn eus ar pajennoù) e teu ar brederouriezh : adarre studiennoù war brederourion allyezh, ivez prederadennoù war ar pezh a reomp hag ar pezh a c'hoarvez en dro dimp.

Evel an niverennoù kent, LAVAR 13 a ro bod da imbourc'hioù yezhouriezh war danvezioù liesseurt, adalek ar jedoniezh pe frammoù politikel Sina betek ar c'heriadurezh, an hiloniezh hag ar bouedvirezh. Pemp notenn a ra stad eus an eskemmoù en dro d' al levr emañ Gab Cherel o prientiñ abaoe bloavezhioù war ar mor hag ar bageal ; eno ivez, gant an araokadennoù kalvezel ez eo bet treuzfurmet al lavar, hag ar brezhoneg, evel ar yezhoù all, a rank mont da heul dre grouiñ un dermeneg hogos en he fezh.

Ur park all a-vec'h gounezet eo hini ar c'hramadeg. Lakaet er-maez yezhadurioù plaket diwar ar gresianeg hag al latin pe torkad an imbourc'hioù renet diouzh ar sell kevadegel, strukturel hag all, ez eo berr an irvi treset abaoe tregont vloaz hervez spered kentelioù SADED. Notennoù gramadegel al levrenn-mañ a venn

¹ Pascal Le Moal & Guy Étienne, *Geriadur ar Mediaoù. Fiñveier, Video* e teir yezh : galleg, saozneg, alamaneg, Preder, 2000.

boulc'hañ unan eus emelloù ar remziad o teraouiñ : eilsammañ en ul lavar nevez ar bruzun yezhadurel deuet betek ennomp en hevelep doare m' o deus an tri remziad kent eilsammet ar bruzun geriadurel.

Ne c'hell ket ar gelennerion gortoz avat. Dav dezho labourat gant ar binvioù soc'h ha teusk lakaet etre o daouarn. An eskemmoù en dro d' ar blegenn m' emaint zo divoud ur peder pe bemp notenn all.

GERVA PREDEROURIEZH LAVAR 11

Abaoe 1966 dindan an talbenn LAVAR ez embannomp testennoù o tennañ d' ar redenn-mañ-redenn eus ar brederouriezh. Ken abred hag er pennadoù kentañ ez anade ar pevar durc'hadur a zo dalc'hmat re ar steudad, eleze 1°) digeriñ d' ar brezhoneg domanioù nevez, 2°) reiñ da anaout prederourion eus an holl amzerioù, 3°) lakaat o labourioù da dalvout war dachenn hon buhez, 4°) diorren ur brederouriezh e brezhoneg. Amveziadoù oa — a gendalc'h da vezañ — lañsus d'an embregadenn : an devezout uhel renet gant aozerion gempred a oar lakaat en hon c'herz ugent c'hwec'h kantvedad ar brederouriezh dre hent yezhoù diorreet kaer evel ar galleg hag an alamaneg ; an troc'h krenn hon eus graet etre hon saviad kenderc'hañ, dre se hon c'healiad, ha saviad-kealiad ar gevredigezh c'hallek, rediet ma 'z omp gantañ da adeiladiñ hon bedouriezh a-ziwar he donañ diazezoù. Doareoù enebus oa — zo bepred ivez — ha, da gentañ, an niver bihan o kemer penn an hent dibabet ; da heul, difondded an darempredoù labour ha, da heul c'hoazh, dibaoted al lennerion mennet da biaouekaat ur yezh hermetek d' o brezhonegerezh eviti da vezañ korf ul lavar peurresis ha sklaer — skoilhoù a gredomp bezañ e-tailh hiziv da barraat outo : treujennet eo ar wezenn hag ar skeul harpet outi n' emañ ken en arvar d' he flean.

Ar skeul a soñjomp enni eo geriadur ar brederouriezh. En eskemmoù en dro da vennoz seurt geriadur¹ e 'm eus pouezet a-hed ar wech war vrasted an trevell e vo e aozañ. Ar brederouriezh ned eo ket ar stlenneg ; hemañ a rann gant e ijinenoù ar perzh da geweriañ termenoù ken sonnet o ster hag ar stlenn douget gant an arhentou, o tremen a yezh da yezh link evel bec'hiadoù tredan. Ouzh kemm, meizadoù ar brederouriezh zo piaouel, n' eo ket hepken d' ar yezh-mañ-yezh, met d' ar prederour-mañ-prederour : en amgant un oberenn e tap pep meizad e ster a-dreuz d' ar meizadoù all. Tu bennak e skriv Merleau-Ponty ne gomprenet ar gerioù kentañ en ul levr

¹ Sl. da skouer KIS-555, La-11, pp. 356 hh. ; KIS-577, La-12, pp. 92-93. Sl. ivez "Kentskrid" LAVAR 12.

prederouriezh nemet ur wech lennet ar gerioù diwezhañ. Alese, pa dremen un oberenn breder eus ur yezh d' unan all, e kemm he armerzh diabarzh : an un oberenn e chom hag en ur ser ez a d' un oberenn nevez, ken e tere komz a amloidigezh kentoc'h eget a droidigezh : pep termen en destenn dal a chom e dalc'h an termen keñverek en destenn gein ha war un dro a skoulm darempredoù gant hollad an termenoù tal, darempredoù o fiñval o unan gant buhez an hil istor nevez ma tegouezh an oberenn. E se, *sémiotique* e ster Julia Kristeva¹ a zave d' ar *pulsion* ; pa droan *sémiotique* dre *eulel* (spisoc'h : pa amloan *eulel* ouzh *sémiotique*) ez emgav ar c'heal (ha gantañ e zave d' al *luzad*) degaset a-geñver gant keal an *ñ* Splannoc'h c'hoazh tonkad an *Dasein* heidegerek. Ken danzeet, ken unveziadek eo ar meizad m' o deus an darn vuiañ eus ar brederourion allyezhañ e zegemeret en e neuz alamanek. Bewech avat ma 'z eo deuet *Dasein* da annezhañ en ur yezh all, ez eus bet krouet e houmañ lies termen a ster amezek a roe evel gwrizioù nevez d' an amprest. Hevelep kurunennad termenoù avat ne c'halle nodiñ nemet diouzh ar preder kentvezant er yezh degemerer. Ur brederouriezh genidik eus ur yezh a dremen en ur yezh all mar kav enni ar c'hondon dezevout barrek d' he dougen ha da vastañ sabr dezhi.

Daou dennad zo enta d' an embregadenn sevel geriadur brezhonek ar brederouriezh : daspugn kement a hanc'heriegoù ha ma 'z eus a brederourion, digej diouto ur geriadur hollek. Hogen, ur goulenn rakwezhañ oa d' ober : ha testennoù prederouriezh a-walc'h zo bet skrivet e brezhoneg evit pourchas danvez d' ur geriadur ? Hag amparet eo a-benn bremañ ar c'hondon dezevout diziouerus ? Kredet hon eus respont ya d' an deiz ma lavaras lennerion e oa bet aesat dezho kompren Husserl ha Heidegger gant an notennoù hor boa savet war an daou brederour.

Alese Gerva Prederouriezh Lavar 12 embannet warlene ha Gerva Prederouriezh Lavar 11 a gaver el levrenn-mañ. Talvoudus int, hon eus spi, evit mont aesoc'h ha donoc'h en notennoù prederouriezh. Diwarno e c'haller ivez kas ar c'hammedoù kentañ etrezek ar geriadur gortozet, ar c'hammedoù kentañ hepken...

MENEGVAOU LAVAR 13

E dibenn al levrenn e kaver evel boaz ar Menegvaou e peder yezh. Resisadurioù a lennor en o lizhad derou. Evit mirout al lennerion a bep mesk etre an daveoù da LAVAR 11 ha da LAVAR 13, hon eus kavet mat lakaat moulañ Gerva Prederouriezh LAVAR 11 war baper arlivek.

¹ Sl. "E sigur ul levr gant Julia Kristeva", KIS-646, La-13, pp. 102-118.

Guy ÉTIENNE